

- 59 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

21. (HA P'EM ME KANT SKOED...)

Ha p'em me kant skoed ha me monet da roll,
mont gantho d'an davarn evit ho frita holl.
Pa deuin-me d'ar gear e livirinn d'ar c'hrek:
fripet eo ar c'hant skoet, n'euz manet eur gwennek.
Ar c'hrek a lavaro : - pep tra zo evelse.
ganehoc'h int gounezet hag e reot adarre.
azezit-hu aze e kichennik ann tan
me gerc'ho d'ehoc'h eur banne da c'hortoz ho koan.
Diviskit ho lerou hag iit enn ho kwele.
Krogit em diou zournik ha va chachit ive
hag antronoz vintin pa zavaz er-meaz ar c'hrek
evit kounta 'nn arc'hant ne oa manet gwennek.

VVVVVVVVVV